


Kan-Bale ar baotred yaouank


a vez oc'h ambroug ar gwaz nevez
pa vez o vont da gêr ar plac'h nevez d'he c'herc'hat
da vont d'an iliz da eureuji.

Komzou : J. AR MARECHAL.


Ton : J.-P. DANTEC.



DISKAN. Ke - me - romp an hent treuz, Rak hen eo ar ber-



ran, Ke - me - romp an hent treuz, Rak hen eo ar ber-




ran, Ke - me - romp an hent treuz, Rak hen eo ar ber - ran. Deomp




da glask va mes - trez, An hi - ni a ga - ran.




KAN. Dre al lan - nou ha dre ar prad, Pe gel li - es em




eus re - det, Pe - gel li - es em eus re - det :



Me gre - de cha - se - al ar c'had, Va c'ha - lon a zo



bet ta - pet, Me gre - de cha - se - al ar c'had, Va



c'ha-lon a zo bet ta-pet: You! you! you! You! you! you! Kemeromp..

Diskan

Kemeromp an hent treuz,
Rak hen eo ar berran,
Deomp da glask va mestrez
An hini a garan !

I

Dre al lannou ha dre ar prad,
Pe gel lies em eus redet;
Me 'grede chaseal ar c'had
Va c'halon a zo bet tapet.

II

Abaoe en denvalijenn,
Chiminal va dous a welan,
En dro dezan eur vogedenn :
Em c'halon eo ema an tan.

III

Hag abaoe kent goulou-dez,
Me gred klevet eur zonen gaer.
Sonenn ken dous ar garantez :
Em chalon ema ar zoner.

IV

Hag abaoe c'hoaz em hunvre
Me wel o kreski eur rozenn,
Warni bleuniou kaer 'vel an de :
Em c'halon ema he gwrizienn.

V

Eun durzunell epad an noz
War ar barr he deus huanadet :
Ne deus na kousket, na repoz,
Pa garer hep beza karet.

VI

Setu perak dre an hent treuz
Er heure-man deomp a-vandenn,
Ha 'benn an noz hep tan, na freuz,
Hon do hor gad brao ha kempenn.